



ISTOR	SKIANTOÙ
Memor ar vro	Kenlabour evit merañ an egor
Gant Yann Bijer	
p. 8	p. 4

Dindan Sellou Grallon
(pe Sous le regard de Grallon)

Albom skeudennaouet
Ment A4 - 36 p.
12 euro
02.98.26.87.12
<http://keit-vimp-bev.info>

Kemper, 2012. Mont a ra Tangi hag e dad-kozh tre en iliz-veur Kemper. Na pegen bras ! Na pegen brav ! Na pegen kozh ! Hag e dad-kozh da gontañ dezhañ istor Pêr, ur bugel dek vloaz, hag a ya da labourat gant e dad Jehan, ur piker-mein hag a labour da sevel an iliz-veur. Un istor kozh-kozh, a dremen e 1452. Hag ul liamm bennak a vefe etre an holl dud-se ?

SAM. 27 SEPTEMBRE
NANTES 14h00 Place de La Petite Hollande
MANIFESTATION

À PARTIR DE 18:00. MUSIQUE AVEC DE GRANDS ARTISTES BRETONS

POUR LA RÉUNIFICATION
CONTRE LA DISPARITION DE LA BRETAGNE DANS UN GRAND-OUEST
Vivre décider travailler en Bretagne réunifiée

Organisée par Bretagne Réunie, avec le soutien de :

www.bretagne-reunie.org

■ Niverus e vo an dud e Naoned. Poent eo derc'hel ur plas en ur c'harr-boutin. Poent eo d'an holl en em aozañ rak un darvoud a-bouez e vo evit dazont hor bro.

(pajennoù 3, 4 ha 5)

ya! KELEIER ETREBROADEL
SEVENADUR HA DUDI
BEAJ STAGADENNOÙ
VIDEOIOÙ

KELEIER BREIZH » KENVEVAÑ » ATERSADENNOÙ
ANEVELLOÙ » BILHEDOÙ » GALLAOUEG » YEZH »

YABZH.COM
HO KAZETENN SIZHUNIEK ENLINENN

LAVARIT HO SONJ
Ho chomlec'h postel ne vo ket meneget / Rediet
Anw *

Brezhoneg war hor f
Pennoù 's 7? <http://>
hours ago

A-bouez eo bezañ kelaouet

Da vare an distro-skol-mañ e fell deomp diskouez deoc'h eo mat bezañ koumanantet da Ya!, evit meur a abeg.

Evit implij asambles ur benveg da genurzhañ.

D'ar 27 a viz Gwengolo e vo manifestadeg Naoned ha fellout a ra da skipailh Ya! ober e seizh gwellañ evit ma vefe ar muiañ a dud o kemer perzh. Setu ma klaskomp – er mare-mañ muioch eget biskoazh – boueta ar preder war ur Breizh pemp departamant, reiñ ar gaoz d'ar re a ra ul liamm etre al Liger-Atlantel ha peurrest ar vro. War ar pajennoù 1, 3, 4 ha 5 e vo kaoz eus se.

Evit kelaouiñ

Dister eo hon nerzhioù, anat. Met abaoe 9 bloaz n'hon eus ket paouezet, bep sizhun, a-hed ar bloaz, e-pad ar vakañsoù. Gant an nerzh hon eus, an arc'hant hon eus, ar skoazelloù a vez roet deomp, e kendalc'homp gant hon hent, gant ar soñj kelaouiñ eus ar gwellañ hag an onestañ.

Evit ober gant ar brezhoneg

Bep sizhun, abaoe 484 niverenn, e embannomp 12 pajennad e brezhoneg. N'eo ket aes atav, da lenn, da skrivañ... Met evel-se e tiskouezomp asambles zo eus ar yezh.

Evit bevañ

Treiñ a ra ar bed, buan. Ha fellout a ra deomp, komz eus ar bed-se, hiziv an deiz, bremañ, hep gortoz, e brezhoneg. Bevañ gant ar yezh ha gant ar bed.

Komprenet ho peus pall ar gasadenn-mañ. Broudañ an dud da vezañ e Naoned e fin ar miz. Ha da vezañ koumanantet da Ya!

(evit resev Ya! bep sizhun betek fin 2014, kasit 10€ da Ya! 29520 LAZ)

Etrebroadel


Norz h Bro-Iwerzhon : ar peoc'h "etre reuz ha keuz"

Ar "frazennoù bihan" a zeu ar-maez an eil àr-lerc'h eben er mare-mañ e Belfast da heul atersadenn Peter Robinson ma 'z eus anv enni da "advarc'hata emglev Sant-Andrev". En o zouesk hini Gerry Adams, penn-bras ar republikaned, ma lavar krak-ha-berr "emañ ar peoc'h etre reuz ha keuz".

O sellout pizh ouzh ar referendom e Bro-Skos emañ tud eus ar Rouantelezh-Unanet er mare-mañ dreist-holl abaoe m'eo aet an tukrefiv gant ar "Ya" er sondadegoù. Abaoe un nebeudig en deus komprenet Yann-Breizhveuriad e c'hellfe mont dizalc'h Bro-Skos tra ma oa kontet trec'h ar "Ya" da vartezeadenn doull a-raok. E keit-se emañ ar soubenn o trenkañ e Norzh Bro-Iwerzhon, al lodenn eus Iwerzhon a zo c'hoazh dindan beli Londrez.

Emglev gwener ar groaz en arvar ?

Da geñver fest ar Sinn Fein, d'an 10 a viz Gwengolo, en deus lavaret Gerry Adams, penn bras ar strollad republikan, e oa "ar peoc'h etre reuz ha keuz". Dazont emglev Sant-Andrev, sinet e 2006 an dra-se a vefe àr an daol neuze, ha pelloc'h emglev gwener ar groaz, diazez buhez politikel an "norzh"



Gerry Adams

abaoe 1998. Hervez ar pezh a zo bet skrivet e-barzh emglev 1998 eo rannet ar galloud e Stormont (sez ar gouarnamant eus "Norzh-Iwerzhon" ha sez an daou gambr) etre ar republikaned hag al lealourion.

Met n'eo choazet an dud hervez

ur mouezhiañ muianiverel. E Norzh Bro-Iwerzhon eo kompliket-tre an doare da vouezhiañ ha da choaz izili ar gouarnamant. Evit an daou gambr (izel hag uhel) eo an "unvouezh treuzkasabl", pe an "unvouezh treuzkasabl hanterat" zoken evit ar senad,

a zo o talvezout. Evit ar gouarnamant ez eus un afer all : ur sistem kensociationel*** a zo bet lakaet e pleustr. Mod-se e c'hell bout "kempouezet" a-walc'h levezon an div gumuniezh er gouarnamant. O vezañ ma 'z eo ar gatoliked ur vinorelezh e-keñver ar brotestanted n'hall ket bout ar sistem mouezhiañ an hini muianiverel mod-all ne vefe ket bet sinet emglev gwener ar groaz gant ar republikaned, anat. Dav eo delc'her soñj e veze ar gatoliked ur renkad a eil renkn'eus ket pell zo c'hoazh.

Advarc'hantañ emglev Sant-Andrev ?

Disfizius eo ar republikaned e-keñver ar lealourion. Aon zo gant ar re gentañ e vefe klasket dre guzh dispenn tamm-ha-tamm ar "c'hempouez" embannet e 1998 gant paotren an Union Jack. "Arabat lakaat reolenn ar muianiver e Stormont da dalvezout" en deus lavaret Adams. "Achu eo da vat gant Stad Orañjez !". N'en deus ket graet ar penn bras republikan anv eus Stad Orañjez milliget gant e gumuniezh dre zegouezh. Ar "stad orañjez" a dalvez da vare an "amzer glouar" evit ar gatoliked, pa veze lakaet e pleustr ar ger-stur "ur stad protestant evit

ar brotestanted" ha gwasket ar gatoliked. "Emañ an traoù àr un ahel politikel negativel" en deus ouzhpennet Gerry Adams. Kement-mañ a za da heul atersadenn Peter Robinson, ministr-kentañ DUP (unvanour protestant) ma oa anv enni da "advarc'hata emglev Sant-Andrev", o lâret eo diazez an emglev-se n'haller ket derc'hel mod-se". Un trouz abominabl a zo bet savet e Norzh Bro-Iwerzhon diàr atersadenn Robinson.

Reuz e Belfast

E gwirionez, a-dreñv seurt frazennoù e santer en dañjer e vefe nullet ar gouarnamant hag ar parlamant emren eus Norzh-Iwerzhon (evel e 2000) ha meret an traoù àr-eeun eus Londrez, ar pezh a dalvezfe da "vombezenn atomek" koulz lavarout o c'houzout emañ stegnoc'h-stegnañ an traoù er stradoù Belfast etre ar strolladoù kuzh protestant ha katolik. Emgannioù a zo etre ar re yaouank ha bombezennoù a vez kavet pe a darzh ingal. Ar sizhun tremenet e oa bet kavet unan e-barzh un hent-riboul. Lakaet zo bet àr chouk ur strollad kuzh republikan.

Fabien Lécuyer

* Vote unique transférable
** Vote unique transférable indirect
*** Consociationnel

Kebek

Disklêriet eo he souvereniezh gant ar bobl indian Atikamekw

E Bro-Gebek he deus adlavaret ar bobl indian Atikamekw he gwirioù kustumel ha disklêriet, en un doare untuek, he souvereniezh àr he bro, e Mauricie-Uhel. Fotañ a rafe dezhe adaptout o douaroù ha ledanaat an tiriadoù ma 'z int bet staliet enne. Met pell emañ Yann diouzh e gazeg c'hoazh...

En ur gemennadenn bet skignet d'al lun 8 a viz Gwengolo gant dilennidi ar bobl Atikamekw, ur "vroad indian" (e-giz ma vez lavaret du-hont) eus Bro-Gebek, o deus "arc'het gwirioù an Indianed àr o douar, an Nitaskinan." "Hiviziken e c'houlennomp groñs ouzh ar gouarnamant e vefe goulennet hon asant pa vo klasket diorren pe korvoiñ an danvezioù naturel a zo e-barzh hon douaroù." eme ar pennoù bras indian.

Hervez ar gemennadenn, "an diskliariadur-se a zo bet votet a-unvouezh" gant dilennidi ar bobl ameridian. "Achu eo an amzer ma veze nac'het gwirioù an Atikamekw da geñver ur stad a embann he reolennoù e-giz ma n'o defe an Indianed tamm gwir ebet. Hiviziken e vo ret d'ar gouarnamant doujañ ouzh hor barnerezh, ouzh hor reolennoù hag ouzh hor c'hondisionoù." eme Constant Awashish, penn bras an Atikamekw eus Obedjiwan e-barzh ar gemennadenn.

Stad ebet eus an Indianed

Da veno an Indianed Atikamekw eo yenc'h-yenañ an darempredoù etre int hag ar gouarnamantoù kevreadel (kanadian) koulz



ha proviñsel (kebekad). "An ensavadurioù publik ne reont van ebet ac'hanomp ha ni zo stanket hor diorren diàr-se. Rediet omp d'ober pep tra hon-unan evit ma cheñchfe an traoù". a zispleg c'hoazh Constant Awashish.

E miz Even en doa embannet Christian Awashish e oa akord gant ar varnadenn douget gant lez-veur

ar C'hanada diàr-benn gwirioù kustumel ar bobl Tsilhqot'in, e Kolombia-Britanek. Ar varnerion o doa anavezet gwirioù kustumel ar bobl Tsilhqot'in àr un tiriad ken bras ha 1750 km². Hervez Christian Awashish, ez eus moaien astenn ar varnadenn-se evit e gumuniezh. Gouez dezhañ, "Setu kreñvaet reklemmoù e bobl àr douaroù en em astenn àr ul lodenn eus



Un obererezh atikamekw

al Laurentides hag ul lodenn eus ar Mauricie".

E 2012 ha 2013 c'hoazh

Kozh eo ar sach-blev etre ar gouarnamant hag an Atikamekw. Kerkent hag en hañv 2012 e oa bet stanket an hentoù e Mauricie gante. Koataerezhioù zo a oa bet skolet gant an taol-se ha korvoiñ ar c'hoadoù eo obererezh armerzhel kentañ ar vro. Ar gouarnamant a renkas plegañ.

Koulskoude, e dibenn ar bloaz 2013, e oa bet skoulmet un emglev "a vroad da vroad" gant Bro-Gebek a-zìr merañ ha korvoiñ an danvezioù naturel. Hogen, nac'het e oa bet an emglev dre referendom gant unan eus an teir c'humuniezh a ya d'ober ar bobl Atikamekw : hini Obedjiwan.

"Penn-boulou" a veze graet eus an Atikamekw gwechall. E 2010 e oant tro 6729 e-barzh tri meuriad. War pevar ziriad int bet rediet d'ober o annez, en o zouesk unan didud ha dister (Coucouché).

En holl, an tiriad reklemmet gante a zo ken bras ha 80000 km², un dachenn bras-divent da geñveriañ gant o ziriad a-vremañ, a-boan 51 km². Ur rannyezh Cri eus familh ar yezhoù algonkin eo yezh an Atikamekw. Gouzout a ra hag ober a ra al lodenn vrasañ eus ar Atikamekw ganti c'hoazh.

Siwazh, gant Philippe Couillard, ministr-kentañ Bro-Gebek, o deus tapet an Atikamekw ur vrelisadenn. Gouez d'an Indianed n'eo ket prest da asantiñ d'o c'houlennoù e seurt ebet. "E-giz boaz en deus lavaret koñchennoù toull, traoù didalvoud." eme dilennidi an Amerindianed da heul un emgav gant ar ministr-kentañ. Hag int da ouzhpennañ "Faotañ a ra dimp kavout un diskoulm dre zivizout, met ma vez graet fas koad gant ar gouarnamant e raimp gant doareoù all". Betek kemer penn "hent ar brezel" en-dro ?

Fabien Lécuyer

Hep Naoned, Breizh ebet !



Sophie ha David Parpaillon, kerent Marius, skoliataet e Diwan Naoned

Ya! : Perak ar c'hoant e vefe kelennet brezhoneg d'ar vugale pa vezer o chom e Naoned ?

Mennet e oamp da enskrivañ Marius e Diwan peogwir eo sevenadur Breizh ul lodenn eus hor buhez, gant ar sonerezh a selaouomp, ar festoù-noz niverus a vez tro-dro d'al lec'h m'emaomp o chom. Ul lodenn eus ar sevenadur-se hon eus c'hoant legadiñ da vMarius eo ar brezhoneg. Un doare eo evidomp da ziskouz omp-ni, ivez, ul lodenn anezhi ha fier omp eus se.

Ya! : Peseurt perzh mat a gavit er skol-se ha na vefe ket roet gant ar re all ?

Ur chañs bras-divent eo an divyezhegezh abred rak reiñ a raio d'ar vugale un aezamant bras d'ober gant ar yezhoù. Deskiñ a ra dezho ivez bezañ digor war

ar bed ha war ar sevenadurioù all. Ouzhpenn-se ar bedagogiezh lakaet e pleustr gant Diwan Naoned a dro war-zu ar c'henskoazell hag emrenezh ar vugale. Plijet omp o welet e c'hell ar gerent kemer perzh e buhez ar skol, ha neuze evel-se e tiskouez d'ar vugale eo pouezus kemer perzh e buhez ar c'hevredigezhioù hag eo o skol un dra bennak a-bouez evidomp.

Ya! : Penaos e kemerit perzh neuze ?

Diaes eo asantiñ, er penn kentañ, e teskfe e vugel hag ez afe war-raok gant ur yezh ha n'anavezet ket. O teskiñ emañ Sophie dre heuliañ kentelioù noz, ha David en doa dalc'het soñj eus un nebeud gerioù bet desket er skol. Met, e gwirionez, e tremen an traoù digudenn. E galleg e kont deomp hor mab Marius ar pezh en deus bevet er skol. Lenn a ra levrioù e galleg ha reoù all e brezhoneg. (ur stal brav-tre hon eus er skol, dalc'het gant kerent bugale zo)



Yann Quemeneur, livour

Ya! : Petra a dalvez deoc'h bezañ ezel ouzh an ACB ?

Seul vrasoc'h e vo ar strollad-se, seul niverusoc'h e vint, seul grefivoc'h e vo an identelezh breizhat. An ACB a vod ur bern arzourien peogwir n'eus aozadur ebet all oc'h ober ar memes tra. Peogwir n'eus abeg ebet, digarez ebet d'en em vodañ e anv Broioù al Liger. Kalz a dud a vez bodet gant an ACB, kalz a arzourien. Ha kouslkoude n'o deus ket ur budjed bras.

Ya! : Ha tost en em gavit ouzh arzourien all eus Breizh ?

Ezel on eus eus Spered Kelt, ur gevredigezh livourien bodet,

liammet gant ur garta. Er garta-se e veneger ur Breizh da 5 departamant. Asambles e oazomp diskouezadegoù. Evel-just omp disheñvel an eil ouzh egile. 350 km a zo etre Brest ha Klisson, etre Chartres ha Klisson. Disheñvel ouzh livourien Brest en em gavan met muioc'h c'hoazh gant unan eus Le Mans pe eus Chartres. Ha tost-tre eus unan o chom e Roazhon, en ur gêr vras pe tro-dro, e Breizh-Uhel, e Bro-C'hall...

Ya! : Heñvel ha disheñvel war un dro ?

Poent eo d'an dud kompren emañ al Liger-Atlantel e Breizh. Ul lodenn eus Breizh eo ivez, emañ. Da ziwall a zo e vefe folklorizet ar Vretoned, e vefe staget outo koef ar bigoudenned. N'eus ket pell zo e kleven unan o lâret n'en em sante ket eus Breizh peogwir n'he doa ket ur c'hoef. Hag ar mediaoù da ziskouez ar Vretoned, o tibarkiñ e Naoned gant o bragoù bras. Arabat deomp mont war an hent-se. D'ar vanifestadeg e Naoned e rankomp mont gant bannieloù Naoned kentoc'h eget gant bannieloù gwenn-ha-du. Ul lodenn eus Breizh eo al Liger-Atlantel. Meur a Vreizh a zo, ken talvoudus an eil hag eben. Breizhat omp ivez, a-drugarez d'hor sevenadur, d'hon Istor, ken breizhat hag ar re all.

René-Claude Migaud, prezidant ar "Collectif Arts de Bretagne"

Ya! : Petra eo an aozadur-se ?

E 2011 eo bet krouet gant 15 ezel o tont eus kement korn eus Breizh, arzourien a-vicher an holl anezho. A-raok ar poent-se e kemeremp perzh e framm an ACB, Agence Culturelle de Bretagne, e Josilin. Met divodet eo bet. Anavezet ha sikouret eo hor c'hevredigezh gant ar Rannvro. Disheñvel omp ouzh an emglevioù arzourien all rak aozañ a reomp etre 3 ha 5 diskouezadeg bep bloaz. 4 a vo e 2014. Goude Gouere hag Eost e Lannuon ez aimp da Lanrodeg. Arzourien kanteerien omp. Trawalc'h eo d'un ti-kêr asantiñ degemer ac'hanomp hag ober a reomp ar peurrest, sevel ar



skritell, istribilhañ hon oberennoù. Ur 15 diskouezadeg hon eus graet abaoe ar penn kentañ. Diaes a-walc'h eo, en ur mod, rak n'ez eomp morse er memes lec'hioù.

Ya! : Perak lakaat ar renerezh en Turballe ?

Peogwir on-me prezidant anezhi. Abaoe ma 'z on bihan e livan. Evel an holl izili all em eus

diskouezadegoù all, savet war ma anv. Setu tout. Plijout a ra deomp ober an traoù asambles. Ne sach ket pep hini eus e du. Er c'hontrol. Ar pezh a zo mat evit pep hini ac'hanomp a zo mat evit an holl. Gant ar spered-se hon eus savet ivez hol lec'hienn.

Ya! : Ha bez' e c'heller lâret zo arzoù Breizh, disheñvel ouzh reoù all ?

N'eo ket sur. Arzourien kempred o vevañ hag o krouiñ e Breizh omp. Ha setu. Lod a grou oberennoù e-liamm anat gant danvez Breizh. Lod all ne reont ket. Evel-just e vez levezonet labour, awen, ijin an arzourien gant ar vro e-lec'h m'emaint o chom. Levezonoù all a zo c'hoazh...

<http://www.collectifartsdebretagne.fr/>



Da geñver Pardon ar Baol

Jean-René Le Huede, e-karg eus Pardon ar Baol

Ya! : Petra eo pardon ar Baol ?

Koshañ gouel ar vro, bet lañset e 47, 67 bloaz zo. Ha brasañ hini ivez. Ar bloaz-mañ zo bet betek 35000 den war 5 devezh, sachet ma oa an dud abalamour d'ar strolladoù Setrice, Ronan er Barzh hag e 5 soner, ur strollad dañserien a Vro-C'halisia. Tud kozh eus ar vro, boas ouzh ar gouel, a lâre din ne oa ket bet morse kement a dud.

Ya! : Penaos displegañ ar berzh ?

Gris e oa an amzer. Deuet eo an

dud, aesoc'h, marteze. Bruderezh hon eus graet war an aodoù ha mignoned an ACB44 o deus graet en douaroù. Ezel on ivez eus kuzul-merañ Gouelioù Breizh, gant an trizek dilennad all eus brasañ gouelioù Breizh. Bep tri miz en em gavomp e Karaez. E miz Even diwezhañ e oan degouezhet eno gant tout ma dafar brudañ. Ha ma holl geneiled o deus kemeret outo evit lakaat e Sant-Malo, Pondi, Brest... ha kement zo...

Ya! : Perak e talvez deoc'h bezañ ezel eus ACB 44 ?

En holl vanifestadegoù evit Naoned e Breizh e kemeran perzh. Reizh eo, ha setu tout.

Poent eo adunaniñ Breizh, evel ma oa a-raok. En iliz-veur eo beziat tud Anna Vreizh. N'eus ket pell e oan o lâret se d'ar maer, c'hoazh.

Tout ar bolitikourien-se a oar eo al Liger-Atlantel e Breizh, a-fet istor met aon o deus gwelet an departamant o vont kuit. Petra a raio ar Mayenne, ar Sarthe ? Eus eno emañ JM Ayrault, da skouer. Heñvel eo evit Auxiette hag ar Vendée.



Frederic Bouley, soner violin er strollad "Jeu à la Nantaise"

Ya! : Petra eo "Le Jeu à la Nataise" ?

Ur strollad a 11 soner hag en o zouez kanerien, dedennet-tre gant ar sevenadurioù bev, ar sevadur brezhonek en o zouez met ivez hini Bro-Iwerzhon. Ur soner trompill a Vro-Bielarus a zo ganeomp ivez, ur ganerez a Vro-Aljeria. Plijout a ra deomp krouiñ un arvest a vefe ur gwir eskemm. C'hoari a reomp un tamm e pep lec'h, Gouel Kerne, en Orient, Temps-Fête e Douarnenez. Meskañ sevenadur Breizh gant ar re all ne c'hell nemet ober vad dezhañ.

Ya! : Ur gêr digor e seblant bezañ Naoned...

Evel an holl gêrioù bras. Abaoe pell e vez digor kêr war an diavaez. Ur porzh bras eo bet hag eo c'hoazh. Dirak an doare formatiñ a vez muioc'h-mui eo a-bouez sevel a-enep. E Naoned

eo dav d'an dud bezañ digor, asantus, pasiant. Amañ en em gav ur bern tud ne ouzont ket kalz a dra a-fet sevenadur. N'int ket bet kelaouet. Dav kemer amzer evit diskouez dezho eo talvoudus bezañ Breizhat. Met arabat ober se en un doare taer. Amzer zo ezhomm kemer.

Ya! : Degas a ra Breizh da Naoned ivez ?

N'eus ket da enebañ Breizh ha Naoned. Ar memes kumuniezh eo. Arabat enebañ toennoù mein glas ouzh toennoù teol. Ur gwir vozaikenn eo Breizh, a-fet dremmweloù, yezhoù, sevelti... Estreget Penn-ar-Bed a zo e Breizh. Ar yezh, da skouer, ar brezhoneg, daoust dezhi bezañ komzet muioc'h e Breizh-Izel, a zo ul lodenn eus glad an holl Vretoned.

Unvaniezh

Sevel Bro-Vreizh : 3 goulenn ouzh Andre Lavanant

Nevez 'zo eo bet savet al lec'hienn "Construire la Bretagne." Displegañ a ra Andre Lavanant pal al lec'hienn-mañ.



Andre Lavanant

Perak sevel ul lec'hienn evel "Construire la Bretagne" ?

Gouestlet eo al lec'hienn da Vreizh 5 departament. Abaoe ma 'z eus bet roet lañs da adframmañ strollegezhioù Bro-C'hall gant prezidant ar Republik e penn kentañ ar bloaz, eo deuet an doser da vezañ 'tousez ar re bouezusañ en ampoent.

Abaoe dekred Petain e 1941 hag a zo deuet da freuzañ Breizh istorel en ur zistagañ al Liger-Atlantel ez eus ul luskad e Breizh a gustum pouezañ evit an adunaniezh.

A bep-seurt zo bet klevet war an adframmañ ar rannvroioù en nevez-amzer e Breizh, er rannvroioù all, er sened hag er parlamant. Jeu zo bet betek an Elysee. An disoc'h deuet er-maez zo bet truezus ha sach-blev zo bet etre ar sened hag ar parlamant. An diviz da vat a dle bezañ kemeret en diskar-amzer. Risklù bras a zo ma vefe kendeuzet rannvro Vreizh gant hini al Liger. Meur a zilennad hag a chome sioul betek-henn pe lod all hag a oa evit B5 o deus troet o chupenn. Ha neuze ar sonj zo deuet gant

un strolladig a-dud da sevel un lec'hienn e-lech ma vije kavet pep tra a vez kontet, skrivet, filmet war ar mod da adframmañ kornôg Bro-C'hall ha dreist-holl Breizh istorel, evel ma vez displeget abaoe pell bremañ gant Breizh Unvan, da lavaret eo 3 rannvro : B5, an 2 Normandi ha Traonienn al Liger. Un arguzennerezh liesseurt ha pinvidik a lak da intent pegen frouezhus e vo evit an amzer dazont tresañ ar rannvroioù nevez war ar mod-se.

Roet zo bet lañs d'al lec'hienn e penn kentañ miz Gouere, daoust d'ar vakañsou a oa o tizkouez penn o fri. Berzh he deus graet

diouzhtu, gouestadikoc'h e miz Eost ha fonnusoc'h en-dro abaoe penn-kentañ miz Gwengolo.

Peseurt liamm ober etre tout ar pezh 'peus graet hag ar pezh a rit ?

Breizh eo a zo all liampadus. Meur a vod a zo da vezañ tomm ouzh Breizh. Va hini zo tremenet dre ar yezh. Ar yezh hag ar yaouankiz gant rouedad ar skolioù Diwan hag gant ar c'hreizennoù dudi. Evit ar re vras gant ar stummadurioù hir e brezhoneg ha nevesoc'h gant ar c'hleweled ha dreist-holl an advouezhiañ..

Ar memes youl eo he deus dalchet ac'hanon da labourat e Breizh ha d'en em gaout e-penn un embregerezh rak ur yezh "minorel" a vez gwelet re evel un ostilh sevenadurel padal e tle kaout he flas er vuhez foran ha neuze e bed al labour ivez.

Krediñ a ran ez eus amzer, nerzhioù hag arc'hant kollet e Breizh abalamour ne 'z eus ket a-walc'h a c'halloud amañ er Vro. Pobl Vreizh zo deuet da vezañ ur bobl c'hour gouest da verañ un toullad mat eus he aferioù hec'h unan.

"Dishualañ ar startijenn", unan eus frazennoù stur ar Bonedoù Ruz a blij din ; en em gaout

asambles, gant tud disheñvel, a orinoù disheñvel, a stummadurioù disheñvel, a skiant-prenet disheñvel, ha sevel raktresoù asambles... E lec'h m'emañ yac'h an ekonomiezh e tle homañ servij da sachañ holl talvoudou an tiriad hag en o zouez ar yezh ; sellomp ouzh emroadurioù Katalufia ha Skos.

Goude bezañ degaset va lod war tachennoù zo, ec'h en em gavan muioc'h war hent ar politekerezh. Mennozhioù e-leizh zo bet dispaket, levrioù ha pennadoù diniver zo bet skrivet, tabotoù didermen... chom a ra deomp da ziskouez bezañ gouest da ober, bezañ atebek.

Perak eo ken diaes kas mennozhioù zo da benn ?

Gant ar politikerezh e vezer dipitet alies rak un diforc'h bras a zo etre promesaoù an dilennidi hag an disoc'hoù. Displeget e vez deomp (ha c'hoazh a-wechoù) n'ez eus ket tu da seveniñ gouestl-mañ-gouestl abalamour da dra-mañ-tra, ha bla bla bla... Soñjal a ran en ur c'hannad breizhat a oa bet anvet da vinistr hag a zispake an dra-mañ din : "Je pensais qu'un ministre avait du pouvoir, mais il n'est qu'un grain de sable dans un immense engrenage dont il n'a

pas la clé".

Eus un tu all, teknokratelezh ar melestradur uhel a zalc'h an traoù evel ma vije gward an templ. Ul lodenn eus ar vuhez zo skornet, ur spered a-intrudu a vez mouget alies.

Kemeromp skouerioù : ar brezhoneg er skol, ar skinwel e Breizh, Breizh 5 departamant, an digreizennañ politikel. War ar skouer gentañ ez eus bet araokadennoùigoù a-drugarez d'an emsaverien. An teir all avat zo chomet bout. Goude 40 bloaz a stourm personel e vezan gwall imoret a-wechoù gant an disoc'h treut-se.

Betek-henn e chom ar spi kreñv memestra ; kenderc'hel a ran gant doareoù seven ha demokratel. Met Bro-C'hall n'eo ket ur skouer vat a zemokratelezh.

Ar pezh a glasker ober a denn d'ar gevredigezh. Ar cheñchamantoù war ar mod da vevañ ha da vezañ a lak amzer da zont war wel. Ar pezh a ranker muzuliañ kentoc'h eo an tuadurioù, ar plegoù. Martezeadenoù frouezhus zo deuet anatok'h e 2013 gant emzav nevez ar Bonedoù Ruz. Bezañ gouest da nac'hañ zo un dra gaer dija ; bezañ gouest da vezañ doujet ha da vezañ mestr war hor buhez zo kaeroc'h c'hoazh !

Ur gartenn nevez

A-drugarez da Skol Uhel ar Vro e c'hell an holl Vretoned kaout ur gartenn nevez eus ar vro, e brezhoneg hag e galleg.

Goude bezañ bet o labourat e-kreiz Bro-C'hall e tistroe Mikael Couteller da Vreizh, e 2010, evel kelenner Istor-Geografiezh e Kallag. Ouzh ar vogger ur gartenn hervez an anvioù kozh. Ha setu eñ, ezel eus ar rann yaouankiz-deskadurezh e Skol Uhel ar Vro, da boaniañ war e urzhiaer a-benn sevel ur gartenn a-ratozh evit e skolidi. Kavout a reas e labour heklek e Bilio, gant Roland Alain, kelenner ar skolioù, gantañ ur vestroniezh war ar c'heografiezh. Hemañ a azasaas ar gartenn-mañ, warni

Breizh ar 5 departamant, evit ma vefe aes da implij evit bugale ar c'hentañ derez. Tri bloaz zo e oa prest ar gartenn met ne oa ket arc'hant gant Skol-Uhel ar Vro. Abaoe zo bet kavet ar 4000€ a vanke evit lakaat an 2000 kartenn da vezañ moulet gant Rouden Grafik e Gwengamp.


Marc'hadmat

"Abaoe m'eo bet brudet an embann ne baouez ket an dud, ur mail bep kard eur." eme Mikael Couteller. Dav eo lâret eo dedennus-tre ar prizioù kinniget, digoust evit an holl skolioù a zo e Breizh pemp departamant, 2€ evit ar c'hevredigezhioù, 5€ evit an dud war o anv.

Dav eo ouzhpennañ ar frejoù kas met anat eo d'an holl e vo marc'hadmatoc'h eget forzh peseurt kartenn all a vez gwerzhet betek 60€ e stalioù zo. "Ar gartenn varc'hadmatañ a zo er bed a fell deomp kinnig." eme paotr Kallag. Pellgargañ anezhi digoust a c'heller ober ivez, evel m'o deus graet 1000 den dre an ABP ha 10000 all dre al lec'hienn Centre Histoire Bretagne.

Pa ra ar gartenn nevez e hent emañ Mikael Couteller o treiñ dija war-zu ur raktres all da gas da benn gant e vignoned eus Skol-Uhel ar Vro, sevel ul levr Istor diwar-benn Breizh evit holl skolaerien ar vro.

Titouroù, c'hoant kenlabourat : educationbretagne@hotmail.com



Labour skolidi

Kanaouenn dañs Sizun



11 Pemp warn-ugent metr donder
Ur foz zo bet kleuziet
Da zalc'her dour ar richer
Evit formiñ ul lenn.

13 Hag e-kichen al Lammfroud
Skedus hag arc'hantet
Evit treuziñ ar fardell
Ur pont zo bet savet.

15 Hag er bloavezh mil nav c'hant
Daou ha pevar-ugent
'Oa echuet ar fardell
E kalon an draonienn.

17 Tudu deus nort Penn-ar-Bed
Troit ho tuellennoù
Dour an Elorn a strinko
Evit hoc'h ezhommoù.

12 Lonket 'z eus daou c'hant
ugent
Devezh-arat douar
Mekanikoù 'deus krozet
E-pad pevar bloaz.

14 Gwelit diwar e c'horre
Menezioù an Are
Ar gweled ha tro-war-dro
Kaer eo d'ho lagadoù.


16 En Drenezh gwechall divrud
Ez eus kalz cheñchamant
Hirio eo anavezet
E pevar c'horn ar Frañs.

18 D'an holl dud 'deus bet enkreuz
Ur ger a drugarez
Rak en desped d'an tregas
'Mañ war-sav ar fardell.



Pennadoù tennet eus Taboulin « Park an Arvorig », gant skol Diwan Kommanna, TES Ti-Embann ar Skolioù.

KEVRIN AL LENN DIANV, troioù-kaer Brendan Follabous



gant aotre JYB-Aventures, troet gant Ya !

Istor ha tresadennoù : Jean-Yves Brouard ha Jean-Luc Hiettre.

GERIOÙ-KROAZ

k269

gant J.-F. Peden

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2						■			
3							■		
4								■	
5			■	■	■				
6					■				
7		■				■			
8							■		
9									
10			■		■			■	
11									

A-BLAEN :

- 1. An den-se n'emañ ket o chom en ul lochenn.
- 2. Hemañ n'eo ket ar paer, war a lavarer e galleg. Stêr Ar Faoued.
- 3. N' ez eont ket war o zreid ! Arme.
- 4. Tostik.
- 5. Aour ar c'himiour. Un doare all da lâz "dindano".
- 6. Drant, brizhvezv marteze. Un den evel den ebet.
- 7. Kant bro kant ... (krennlavar). Dibenn-ger an unanderenn.
- 8. Falla a raes. Vefe.
- 9. Etre Gazilieg ha Gwern-Porc'hoed.
- 10. Ger-mell. Penn listenn stêrioù Frañs.
- 11. An hini, ur vaouez, a laka prop.

A-SONN :

- I. Un doare da lakaat, a capella, an dañserien da vont en-dro e Breizh (tri ger).
- II. Laka liv an aour. Deiz kentañ ur miz.
- III. D'ar 26 a viz Mae war an deiziadur. E weladenner kentañ a voe Gagarine.
- IV. Lakaio un danvez du war an hent pe war al leur. A-raok Neven war an deiziadur.
- V. Aviañ a rae. "Cool"-kenañ, mod Reter-Pellañ.
- VI. Evel un ti na oa ket bet peurechuet, pe skoet gant ur sapre barr avel ! Kordenn a zalc'h ur wern.
- VII. Aes eo en ober, diaesoc'h seveniñ. Sant tregeriat (chapel e Lanvaeleg). N'eo ket diouizieq.
- VIII. Arall. Gouelañ a rae gant glac'har.
- IX. Ur mekanik a gemer lañfas evit reiñ peadra d'ar gwiader.

SUDOKU

live etre

		8							
	9			1	5				
2	1			6				8	
1				5					4
6	7	4		3		5	1	8	
9				8					3
	3			9				4	7
			3	4				2	
							1		

SEKRED KEGIN

gant *Entraide pour la vie* hag Arvorig FM

Saladenn gant kraoñ ha bezhin "duls"

Evit pevar den :

- 100 gr a vezhin "duls"
- Troadoù melc'hwed
- Had kelliget: alfafa, fenugreek, soja glas
- Kraoñ

Al lipig

- Chug ur sitroñs
- Ul loiad vras a d/tamari pe shoyu
- Ul loiad vihan a c'h/gomasio
- Ur penn kignen
- Div loiad vras dour



Troc'hañ ar bezhin "duls" a dammoù. Meskañ ar salad, an had kelliget hag an tammoù duls. Skuilhañ al lipig ha strewiñ tammoù kraoñ war c'horre.



Yec'hed mat d'an holl !

Kinniget gant *Entre-aide pour la vie* eus Plabenneg hag Arvorig FM.

Selaouit ar sekred kegin-mañ disadorn ha disul da 10e45 war Arvorig FM 91.7 hag arvorigfm.com

Diskoulmoù Ya ! 483

D	I	G	O	R	P	R	E	D
E	B	E	N	I	N	R	I	
P	I	D	E	N	I	L		
A	L	E	N	O	T	O	E	
R	T	N	K	A	N	N		
T	R	E	O	A	D	E	N	
A	E	R	Y	E	N	N	A	
M	U	I	A	N	E	N	D	
A	T	E	R	S	E	R	E	
N	N	E	V	E	R	N		
T	R	E	S	E	N	N	A	

8	6	7	1	2	9	4	5	3
3	1	5	6	8	4	9	2	7
2	4	9	3	7	5	6	8	1
7	2	6	8	9	3	5	1	4
4	8	3	5	6	1	2	7	9
5	1	9	7	4	2	8	3	6
9	3	4	2	1	8	7	6	5
6	5	2	9	3	7	1	4	8
1	7	8	4	5	6	3	9	2

SKINWEL



Frañs 3

An holl abadennoù a c'hellit gwelet pe adwelet war www.France3breizh.fr

Mouchig dall d'ar sadorn 20 a viz gwengolo da 10e50

Abadennoù da vezañ kavet, sellet hag adsellet outo war ar rouedad : www.France3breizh.fr

Kavout a ra Tud medalenn ur sherif. Fiskal ! Laouen e vo-eñ o reiñ urzhioù d'an holl, o tennañ gant e bistolenn...

Gwir pe gaou : ar sizhun-mañ : Jules Verne

Daouarn ampart : ar sizhun-mañ : listri houarn ha plastik

Ma vijen : bugale skol publik Douarnenez o deus respontet da c'houlennoù dic'hortoz Aziliz Bourges. Ar sizhun-mañ : ma vijen... Ur vicher

Ekstra terra : Dindan ur volz leun a stered e tizoloer bedoù liesseurt, lod gwirheñvel ha lod all n'int ket. Ar sizhun-mañ : enez ekstra

Ma flanedenn gaezh : ar sizhun-mañ : argarzh. Aon en deus Gwendal rak ar bleizi. Zina a lak anezhañ, gant e c'hoar Katig, da gejañ gant unan anezho, evit ma anavezfent gwelloc'h al loened argarzh gant an dud.

Lodenn ar vugale : ar sizhun-mañ klasad skol-vamm skol Diwan Dinan a gano "O tont en-dro".

Bali breizh d'ar sul 21 a viz Gwengolo da 11e

Abadennoù da vezañ kavet, sellet hag adsellet outo war ar rouedad : www.France3breizh.fr

Heuliadoù : "a-viskoazh" hunvreoù ha c'hoantoù kuzh a zo sanket don e spered pep hini ac'hanomp. Ha ma teufe an hunvre kaer-se da wir ? Hiziv : "Keridwenn" he hunvre ? Bleniañ ur c'harr nerzhus.

"Henri Rannou, martolod e boutailh" abaoe 40 vloaz emañ Henri Rannou o sevel bagoù da lakaat en boutailh. Reiñ a ra korf da istorioù a vor o deus bet skoet e spered : Moby Dick, Titanic, Pourquoi Pas... Istorioù ha darvoudoù bet bevet gant ar voraerien. Hiziv : "an Titanic". Pedet : Ronan Hirrien.

Sonerezh : gant Pipe-Band Brieg eo aet ar maout er rummad 2 ar "World pipe band championships" e Glasgow aozet d'ar 15 ha 16 a viz Eost 2014. Un trec'h kaer e bro ar pipe bands ! Thelo en deus pedet unan eus Bagad Brieg : Erwan ar Gars.

Etre daou : Lela, Lucille, Soaig ha Brieg a zo e pevare klas e skolaj Diwan Gwened. Kas a reont o amzer asambles, lodenniñ hag eskemm a-hed an deiz diwar benn munudoù ha darvoudoù pemdeziek o buhez. En oad krenn emaint, etre daou. Pedet : Lucille Hayere, unan eus ar skolajidi.

Breizh kiss d'ar sul 21 a viz Gwengolo da 11eur50

N°25 /36 : "O-unan-penn" prest eo Loig da vageal e-unan-penn gant ma vo Mathilde o heuliañ pep tra eus ar gêr evel-just.

ARZ

gant Jil Daniel

Miz Gwengolo, Roazhon, distro-skol evit an arzourien hag an embannourien bihan.

1. Dibosupl mont da welet un diskouezadeg er c'hreizennoù arz e penn kentañ ar miz. N'eus ket unan a zo digor... Perak 'ta ? Peogwir e vezont holl o prientiñ un diskouezadeg nevez a vo digoret evit Play Time, bienal Roazhon evit an arz a-vremañ a grogo e fin ar miz (d'ar 27 evit bezañ resis). Tri live diskouezadeg a vo : re ar bienal, ar re bennañ e karter nevez ar Kourouz, e mirdi an arzoù-kaer hag er Frac, re ar genlabourerien, da lâret eo an aozadurioù arzel publik dezho ur vent etre, ha re an Off, da lâret eo an aozadurioù bihan pe prevez. Boñ, ret e vo gortoz un nebeud sizhunvezhioù a-raok gwelet an nevezintioù hag an aozadurioù bras o tihuniñ hag o tigorñ o dorioù evit ar bloavezh skol nevez.

2. Petra ober neuze da c'hortoz ? Mont er Marché noir eta ! E-pad eil dibenn-sizhun ar miz ez eus bet ur saloñs savet evit an tier-embann bihan liammet gant bed an arz hag ar skeudennaouiñ. Un nebeud

diskouezadegoù a zo bet digoret er memes koulz e diskouezvaoù bihan ar gêr. E-pad ar gouel-se e oa tu ivez selaou ur prantad komz war an embann bihan ha neuze kaout un nebeud elfennoù da gomprenn kudennoù ekonomikel ar strolladoù a ra ganti.

En o zouez e oa daou werzher levrioù o deus ranket serriñ o stal ar bloaz-mañ, erruet skuizh ma oant o terc'hel o stalioù gant nerzh o youl hepken.

Ar gouel a oa ivez un abeg da deurel ur sell war ar strolladoù

grafourien ha tresourien yaouank ar vro ha pelloc'h.


3. Setu tout ? O nann avat ! D'ar 27 c'hoazh e vo digoret lec'h nevez diskouezva an ti-embann L'endroit e-kreiz karter Colombier. Peadra d'ober un tamm tro da zañsal etre div werennad ha da reiñ un taol sell bihan d'al levrioù, skritelloù ha dafar moulet an ti-embann.

Setu aze peadra da ijinañ e vo brav ha dedennus an diskar-amzer e Bro-Roazhon.



SINEMA

Jean-Claude Le Ruyet



À la recherche de Vivian Maier

Sevenet gant John Maloof ha Charlie Siskel (2014)

Gant : Vivian Maier, John Maloof...

Tud zo e vez komzet anezhe diouzhtu, hogozik goude o c'henedigezh pe goude o bloaziadoù kentañ d'an nebeutañ. Mozart da skwer, hag a oa ur mestr dija da bevar bloaz, mes tro am eus bet ivez, n'eus ket pell zo c'hoazh, da welet ur paotr bihan a Vro-Sina é soniñ gant ar piano, fasibl evel ur maestro leun a skiant-prenet gantañ. Siwazh n'em eus ket dalc'het soñj ag e anv. Marguerite Yourcenar, en he levr Mémoires d'Hadrien, a skrive ne vehe ket komzet a Julius Kaezar hiziv pa vehe bet marvet da hanter-kant vloaz : goude an oad-se en doa graet e daolioù brudet, ar re dalc'het gant an Istor. Dam ya, lod ag an dud, mes nebeud anezhe neoazh, a daol o frouezh diwezhat. Gwazh a-se evite mar marvont e-raok an termen. Gwazh a-se evit ar bed ivez (marse) : den ne ouio biken peseurt teñzor o doa da leuskel dimp ! Arabat gortoz ho retred evit ober ar pezh a blij deoc'h enta, pe evit ober ar pezh a gont ar muiañ evidoc'h. Lakaomp e vehe goulnennet ganeoc'h : da eur ho marv, peseurt tra ho pehe keuz dezhañ bout chomet hep en ober pe hep en kas da benn ? Ale tudoù, mard oc'h é vevañ frankilik hag ar santimant-se en ho pennoù ho peus laosket a-gostez un dra bouezus, na chomit ket da strañ na da ruzal ken ! Stagit gant ho pennoberenn diouzhtu, taolit ho jol, taolit ho tonezon, taolit ho pinvidigezh er-maez d'o roiñ d'ar bed...

Ma, setu amañ un den ne vehe ket bet klevet komz anezhañ marse keneve un arall. An den : sevenser an teulfilm-mañ, un Amerikan yaouank, John Maloof. Ha piv e oa an arall ? Ur vaouez bet ganet e New York gant ur vamm a Frañs hag aet da vevañ e Chicago. Labouret he doa, ya : diwallerez bugale vihan, "noun" kwa. Setu aze ar vicher he doa graet he buhez-pad. Ne oa ket an dra-se he fal, tamm ebet, mes ur mod d'ober ar pezh a gare ar muiañ ober. Gras d'ar vicher-se e yae-hi er-maez, er ruioù, e-sigur monet da aveliñ pennoù ar re vihan e oa e karg anezhe. Mes ne oa ket ar pezh a rae hepken : ar pezh a blij dezhi dreist pep tra oa tennañ portredoù gant he Rolleiflex prenet dezhi, unan modern a-walc'h evit ar mare, gouiet a rit marse, ur benveg-fotoioù a vez dalc'het douzh ho kof ha sellet douzh ar sujed eh oc'h edan fotografiañ dre ur prenestrig brasik a-walc'h war lein ar voest. Ur model kozh bremañ marse, mes efedus.

Selaouiñ ar pennad-mañ war Radio Bro-Gwened. Bep gwener da 7e45 hag adsignet da 6e15 da noz

www.radiobreizh.net, radio bro gwened, sinema

Evit sikour tud Goure

E 1999 eo deuet Hadiza Dedessus-Le Moustier da chom e Bro-C'hall met n'he deus ket disoñjet he c'hêriadenn orin, Goure, ha sikour a ra ar merc'hed chomet eno.

Eus Aodoù an Hanternoz e oa aet Ivan Le Moustier da labourat war dachenn an dour e Bro-Niger, ha graet en doa anaoudegezh gant Hadiza hag a zeuio da vezañ e wreg. Nepell goude e oant e Sant-Brieg, ar gwaz o labourat e kuzul-meur an departamant. Hag Hadiza da grouiñ ar gevredigezh Fandiyema e 2006. Kavout a raio skoazell tud eus ar vro, he zud-kaer, eus Kermaria an Izkuit, e-kichen Plouha, tud mennet evel Catherine Desbruyères... Asambles e tastumjont arc'hant da gas betek Goure, e reter an Niger, ur gêriadenn a 15000 den en un takad a gonter 60000 den ennañ. Arc'hant a vo roet dezho gant an departamant hag ar rannvro ha kêr Sant-Brieg. Arc'hant a c'hounezont ivez gant gwerzhañ kartennoù, tammoù artizanelezh o tont eus eno war marc'hadoù Nedeleg, aozañ gwerzhadegoù skarz-h-grignol. Gant an amzer en deus kavet ar c'houblad dilloñ war-zu Lyon gant ar soñj e vefe aesoc'h da Hadiza kavout labour pa labour Ivan e servijoù rannvro Rhône-Alpes. Estreget ober war-dro o bugale Malik ha Nael he deus lakaet en he fenn krouiñ un astenn da Fandiyema Breizh. N'eus ket pell zo he deus laosket ar post prezidantez gant ur geneilez, Maradi, o tont eus an Nijer, hi ivez. **"Met kalz muoc'h a vaouezed eus Bro-C'hall a**



Prezidantez Fandiyema Goure, Catherine Desbruyères prezidantez Fandiyema Breizh, bezprezidantez Fandiyema Goure hag Hadiza Dedessus-Le Moustier

zo e Fandiyema, memestra. a zispleg-hi. Bremañ e konter div greizenn Fandiyema. Skipailh Lyon a raio war-dro ar mikro-kredit. Skipailh Breizh war-dro ar skol-gwriat hag ar skol-deskiñ.

Mikro-kredit

Sikouret o deus tud Fandiyema da grouiñ un aozadur a vez renet gant tud Goure, e gwirionez. Ar

merc'hed o chom eno a zibabo piv a vo sikouret, da biv e vo prestet arc'hant. 56 den a zo bet sikouret betek-henn. **"A-wechoù int deuet evit un amprest bihan. Ha dont a reont en-dro goude."** eme Hadiza Dedessus-Le Moustier. Bez' e c'hell bezañ sammadoù bihan 10-20€ evit gwellaat o stal, gwerzhañ bignez pe traoù all. 6 miz o deus evit kas an arc'hant

d'ar gêr, gant ur c'hampi a 3%. **"Met aet eo ar merc'hed-se pelloc'h."** emezi. Aozañ a reont un doare lotiri evit sikour maouez pe vaouez da gaout arc'hant da seveniñ o c'hoant.

Sikour Breizh

E Goure n'eo ket gwallbinvidik an dud. Ne c'helle ket ar prefeti sikour anezho nemet o reiñ bod dezho

evit ma c'hellfent sevel ur greizenn stummañ. Abaoe daou vloaz e vez an itron Fossam, bet lakaet dilabour goude ma vefe echu gant ur programm kaset da benn gant ar bank bedel, o kelenn ar yezh kamori d'un 20 maouez bennak, tud na ouzont ket lenn, na skrivañ, na kontañ. En ur vro e-lec'h ma vez ar galleg ar yezh ofisiel e vez implijet kalz an haouissa hag ar c'hamori, ur yezh a vez komzet kalz e reter ar vro. 2 eurvezh bemdez, etre 2eur ha 4eur, e pad ar c'hentelioù, rak aozet e vez ar c'hentelioù - e karter Sabon Fari warlene, e Moustaphari ar bloaz-mañ - evit ar mammoù o deus bugale e karg.

E-kichen an dra-se o deus digoret ur stal gwriat. Aet int betek Zinder, kêr vras ar vro, da brenañ un dek mekanik Singer bennak, lod o vont en-dro gant tredan, lod all gant nerzh an troadikallat, a-drugarez da sikour rannvro Breizh. Ha bremañ zo un tregont maouez bennak o tont da heuliañ kentelioù ar gwiader Idrissa Maloum Abdou, eus 9 eur vintin da 4 eur abardaez. Ouzhpenn fardañ dilhad evito e fardont ivez dilhad da vezañ gwerzhet evit degas un tamm arc'hant d'ar greizenn.

Kenderc'hel a ra Hadiza Dedessus-Le Moustier gant he c'hefridi, daoust m'eo diaesoc'h-diaesañ d'ar c'hentelioù d'al liammoù gant ar broioù-se abalamour d'ar brezel. Ur wech an amzer e vez un ezel o vont di, daoust ma vez dialiet gant ar gouarnamant. **"Met, eus ur mod all, eo mat deomp. Evel-se e wel tud, merc'hed ar vro, du-se, n'emaon ket manan o soursial eno."** emezi

Ar skav, louzoù an apotikerien

Ar skav a veze implijet kalz gant an apotikerien, gwechall ; evit gwir, ar skav zo e-touesk ar spesadoù gwez implijet ar muiañ er fitoterapiezh, er broioù-mañ. Ar c'hroc'hen glas, dindan ar rusk tev, eo pezh talvoudusañ ar wezenn. Dastumet e vez anezhi, o tibluskañ ar skourroù hag o raklañ anezho gant ur gontell lemmet fall (evit chom hep kaout koad gant ar rusk). Troazhus eo ar rusk-ze, dreist-holl. Laoskus eo ivez. Ouzhpenn-se, ne ro ket poan gof ! Ganti e veze pareet meur a gleñved : pa ne 'z a ket mat al lounezh, dreist-holl, (droug al lounezh, da skouer) met ivez, ar remm, an droug-dent, an arouez, arouez an tri-gevell, pergen, hag an droug-kroc'hen ! Fardet e vez ganti ur seurt bervadur : 20 pe 30 gramm deus ar rusk-se, gant un hanter litrad dour pe laezh, hag a vez evet e 3 pe 4 gwech a-raok debriñ. Kavet e vez ivez gwinardant skav an apotikerezh. Henezh zo aesoc'h evit ar re n'o devez ket ar plant fresk en o liorz, pe n'o defe ket bet an amzer d'ober o-unan o louzoù (10 takenn en ur werennad dour 5 pe 6 gwech bemdez evit an dud deuet, hag an hanter evit ar vugale). Hogen, arabat tremen ar muzulioù-se, rak dañjerus e c'hellfe bezañ ! Tammoù all deus ar wezenn a zegas ar memes gounid, met pas


ken krefñ. Ar bleunioù, memestra, a c'hell bezañ sec'het ha miret pell a-walc'h. Kalzaesoc'h da implijeo ar frouezh, ha mat da zebriñ int ouzhpenn-se. Fardet e vez ganto ur seurt kaotigell a vez graet "rob" diouti : ul lodenn a frouezh dave ha div lodenn a vel, ha poazet ar meskaj betek kaout un dalc'hañs sirop. Debret vez etre 10 ha 60g anezhi bemdez. Allas, an efedusted az a da get gant an amzer o tremen : ar freskañ ar gwellañ (diwallit diouzh ar frouezh kriz, memestra, a c'hell reiñ poan benn).

Evit diskouez pegen talvoudus eo ar skav, e vez komzet deus un den a zo aet d'an anaon d'an oad a 120 bloaz ! Lârout a rae an den-mañ en doa bevet ken pell a-drugarez d'ar rob a zebre bemdez ! Hag ar rob-se, zo kaeroc'h, a wareze anezhañ, hervezañ, ouzh ar vosenn ! Gwareziñ, magañ, ha pareañ an dud, al loened, hag ar plant, reiñ danvez evit fardañ traoù talvoudus, kinklañ an endro : perzhioù dibar a ra anezhañ gwir ael mat al liorz !

Jean Herrou



BUHEZ KEVREDIGEZH



Tennañ gounid eus an amzer vrav, avelañ e benn ha reiñ un tamm skoazell d'ur gevredigezh a gustum skoazellañ e nesañ, setu ar pezh a vez pedet an dud d'ober, ar re a zo o chom e kostez Bro-Leon, d'an nebeutañ.

Setu amañ un doare da adlâsañ ur mennoz a oa bet boulc'het un tamm amzer zo dija, reiñ da c'houzout ar pezh a vez aozet er vro gant ar c'hevredigezhioù a zo bet komzet diwar o fenn e Ya! e-kerzh ar mizioù diwezhañ. Un doare da ziskouez e ra an dud-se war-dro an ekologiezh pe ar c'henskoadell a-hed ar bloaz ha n'eo ket nemet ur wech, amzer ur pennad.



Tomaz Laquaine : “An istor da ziazez ar stourm”



Tennañ gounid eus ar pezh a zo bet kaset da benn gant ar re all, er broioù all, pe e Breizh en e raog, e fell d'ar studier yaouank ober. Evit bezañ efedusoc'h er stourmoù da gas da benn en amzer da zont.

E evel Enklask : Furchal en istor a blij din, lakaat ma fri en dielloù, er c'helaouennoù kozh, mont da gaozeal gant an dud, klask kompren peseurt mod eo tremenet an traoù ha perak. Emaon o sevel ul labour skol-veur diwar-benn istor Stourm ar Brezhoneg (SAB), ur strollad a zo bet oberiant-kenañ e-pad eil lodenn ar bloavezhioù 80 met ivez er bloavezhioù 90. Stourmet o deus tud SAB evit kaout panneloù brezhonek, evit ar C'HAPES hag an DEUG brezhoneg, evit plantañ brezhoneg en tele hag all. Gounezet zo bet stourmoù, kollet reoù all. Kalz a dud eus SAB zo bet barnet ha kondaonet. Un istor interesant a-walc'h e meur a geñver eo hini SAB a-benn ar fin hag erru poent kontañ anezhi, me gav din.

Mont a ran da welet tud a zo bet e-barzh SAB evit kaozeal eus ar pezh o deus bet graet. Pinvidik e vez ar c'haezeadennoù dalc'hmat. Pep hini en devez un dra a-bouez da gontañ, forzh penaos. Me 'gav din e ranker anavezout ha dielfennañ 'pezh a zo bet a-raok evit bezañ gouest da gas ur stourm speredek hag evit gounit traoù. Emichañs e talvezo ma labour d'an dud a stourm evit ar brezhoneg hirie-an-deiz ha d'an dud dedennet gant istor ar brezhoneg dre vras. Met n'eo ket peurskrivet ma c'hounskrid, labour zo c'hoazh... Just a-walc'h, m'ho peus dielloù er gêr, m'oc'h bet e-barzh SAB hag ho peus traoù da gontañ, na chomit ket war var, skrivit din !

H evel Harmonika : Abaoe un toullad bloavezhioù bremañ e sonan eus ar benvegig burzhuduse, marc'had-mat hag aezet da goachañ e foñs e chakod. Sot on gant ar muzik blues ha gant sonerien harmonika evel Sonny Terry da skouer, ur bluesman dall a gustume seniñ asambles gant e gomper Brownie McGhee. Kalz a sonerien harmonika nevez a blij d'am skouarn ivez : Brendan Power, Jacob Vennndt, Annie Raines ha... Jean Sabot, ur breizhad a oar ar stek da seniñ sonerezh lwerzhon gant un harmonika, me lâr deoc'h ! Met Rory Mcleod eo an hini a blij din ar muiañ tout. Skodeget e oan bet p'em boa klevet anezhañ evit ar wezh kentañ e Roazhon da goulz Le Grand Soufflet e 2011. Un soner hag ur c'haner folk barrek ken eo barrek ! Pa fell din ober un troc'h em labour peotramant p'am bez hirnez e sonan un tammig. N'eus tra par da huanadenn un harmonika evit luskellat ar velkoni, me lâr deoc'h !

K evel Kembre : Etre miz Gwengolo 2012 ha miz Even 2013 e oan o studiañ e kêr Aberystwyth, e kornôg Kembre. Div gañfardez eus ar c'hentañ troc'h a oa deuet eus Breizh ganin ivez. Plijadur e-leizh hon eus bet ! Beajiñ, kaozeal tro-ha-tro brezhoneg, kembraeg pe saozneg, lipat bannac'hoù cwrw en ostalirioù, kejañ ouzh brezhonegerien ar vro zoken ! Abaoe e tistroan da Gembre gwezh-ha-gwezh evit pleustrif war ma c'hembraeg ha mont da welet ar vignoned ! Traoù kaer zo da welet du-hont, ha tud a-feson ivez !

Me soñj din n'eo ket didalvez teurel ur sell war istor ar c'hembraeg evit boueta ar preder war istor hor yezh-ni. Souezhus eo bolontez ar gembraegerien hag ar c'hembraegerezed da adsevel o yezh er bloavezhioù 70-80. Kalz a voued am eus kavet e-barzh ul levr bet skrivet gant

Kembre (met moarvat n'em eus ket gwelet a-walc'h !). Me gav din eo kentoc'h Euskadi ha Katalonia a zle levezoniñ ar stourmerien yaouank bremañ. Erfin, setu ma soñj bepred !

Y evel Yod-Kerc'h : Un deiz ma oan etimaeontremboadiskoachet eus e zielloù un niverenn eus Yod-Kerc'h a gonte avañturioù Kargedoull, ar Ribouler masklet ! Ur c'hofad c'hoarzhin hon oa graet, me gant ma c'henitervez, o lenn anezhi ha kerkent hon oa degaset ar skouerenn d'al lise evit diskouez ar burzhud-se d'hor c'hamaraded. Goude-se em boa kavet skouerennoù all e-barzh levraoueg skol-veur Roazhon 2. Traoù meurdeuz a gaver e-barzh an niverenn gentañ, embannet e miz Even 1972, evel Manifesto al Lonkerien Chouchenn (istorel !), pe c'hoazh barzhonegoù psikedelik evel Klemmigan Bara Dous. Bet on o kontañ kaoz un tamm gant un darn eus an dud o deus bet ur perzh e-barzh troioù Yod-Kerc'h, daou ugent vloaz zo bremañ, plijadur zo bet !

Souezhusat tra, kavet em boa niverennoù eus Yod-Kerc'h pa oan e Kembre. Goude-se em boa kavet reoù all er stal-levrioù Gwrizienn, e Bécherel e-kichen Roazhon. Evit ur gwenneg bennaket e oant aet ganin ! Marteze e vo embannet un deiz bennaket ul levr diwar skridoù ha tresadennoù Yod-Kerc'h, piv oar ? Brav vefe !

Z evel Zinn : Ar bloaz paseet em boa lennet ul levr dispar diwar bluenn an istorour amerikan Howard Zinn, Un Istor Bobl eus ar Stadoù-Unanet (*A People's History of the United States*

e saozneg). Kontañ a ra istor ar Stadoù-Unanet diouzh sell an dud na vez ket klevet o mouezh en istor ofisiel gwech ebet. Kaozeal a ra kalz eus stourmoù ar vicherourien hag ar micherouezed, eus stourm ar pobloù “indian” hag eus ar re zu, eus stourmoù ar merc'hed, eus emsavioù ar brizonidi, hag all. Un istor a aloubadegoù hag a lazhadegoù eo istor ar Stadoù-Unanet, un istor a ouennelouriezh hag a impalaerouriezh. Ha tost a-walc'h eus istor ar Stadoù-Unanet eo hini ar Frañs, hep mar na marteze.

Howard Zinn a zo dioutañ un istorour met ivez ur stourmer n'en deus ket paouezet da gemer perzh er stourmoù a zo bet evel mein-bonn e-barzh e vuhez : stourm ar studierien zu e Atlanta (Georgia) pa oa kelenner yaouank, ar stourm enep ar brezel er Vietnam. Ma fell deoc'h gouzout piv oa an I.W.W (Industrial Workers of the World), piv oa Emma Goldman hag Alexander Berkman, piv oa Georges Jackson (soñj ho peus eus kanaouenn Storlok emichañs !)...lennit levr Howard Zinn !

Goût a ran emañ ar gevelouriegleweled Les Mutins de Pangée o sevel ur pezh film hir diwar al levr-se. Rakprenañ ar film a c'heller ober. A-drugarez d'ar rakprenaadennoù dreist-holl e c'hell ar sevenerien sevel ar film ! Un dra bennaket da dennañ eus buhez Howard Zinn ? N'eus ket ac'hanomp “paour-kaezh bougreed gwall zister e-skoaz ar blanedenn donket” evel a lavare Youenn Drezen e-barzh Itron Varia Garnez, stourm a c'hellomp ha cheñch an traoù !

Prenadennoù ordinal*



© PHILIP

*Achats ordinaires / **Mon engagement pour l'emploi.

Pour votre santé, évitez de grignoter entre les repas.
www.mangerbouger.fr

Souten a ran an implij**



www.produitenbretagne.com

